



CANAOUEN NEVEZ.

Var Ton Nevez.

1.

M'AM be avoalc'h a study, a speret da rima,
Hac eur bluen em dorn, a me prest da scrifa,
Me gompose eur reglen ervez va santimant,
Var sujet un antretien entre daou zen yaouanc.

2.

Mæs quent avans davantaich me c'houlén asistans
Eus ar sperejou caëra quent evit e hoummans,
Da rei lumier d'am speret pa m'eus occasion
Da ober ur son nevez hervez ma intantion.

3.

Pa lennan ul leor bian zo en cayer ma study,
Me gav traou surprenant hac a ra chagrin din,
Pa lennan va fleneden scrifet gant va mestres,
Eus va brassa pligeadur me am eus tristidiguez.

4.

Pa voan ebars va jardin em oll gontantamant,
Me remercas eur fleuren a voa yie a brillant,
Quen brillant e voa e deillou hac an eol ardant,

(2)

Pa deu dean para ebars ar firmamant.

5.

Ounez zo eur fleuren eus a velanconi ,
Antreet em doun halon a diez da effaci ,
Prins an oll amouroustet roue an dud yaouanc ,
E cundu dre e sellou d'am renta languissant.

6.

Quenta m'am boe an enor da velet va mestres
Evoa er porchet goude an ofern bred ,
An eil goech ma e gouelis assuri a allan
Evoa ebars en ilis bet e communia.

7.

O ober e fasq quenta e mesq ar vugale.
Dar point-ze evoa yaouanc a me a voa ive ,
Abea ur pennat goude e his d'ar scol da Vengamp ,
Hac hi er memes amser a voa bars ur gouant.

8.

M'atenis da zilezel va education ,
Evit dont de antreteni eus a greis va c'halon ,
Evit dont da antreteni Rouanes ar fleurieu ;
Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

9.

Ounes a zo eur fleurentus a velanconi ,
Caëroc'h evit fourdelis nac ive roumarin ,
An nez dezi da goenvi , assuri a allan ,
E lacai va c'halon var ar poent da rannan.

10.

An eil de a vis eost me lacas em speret ,

(3)

Hac ive em fantasi mont da velet merhet
 Mont da velet ma mestres Rouanes va c'halon ;
 Va ol desir er bed-m'an , va inclination.

11.

Bonjour deoc'h va mestres , an devo a hirie ,
 Gant eur galon gontant evel zo ganeme ,
 Conscoude pa en em sonjan e voa din lavaret ,
 Ne ran nemet coll amser o tonet coelet.

12.

Sot oc'h va servicher ma teui da gredi
 Ar goal teodou miliguët zo o clasq or separi
 A pa vec'h dime dispennet quer munut hac ar pel ,
 Ze ne raffe quet dime donet d'o tilessel.

13.

Pel zo demeus a amser me am boa desiret
 E teujac'h d'am saludi evel va muia caret ,
 Ne lavarac'h guir ebet , ne rec'h quet a seblant
 Me am boa displijadur mar e deo a merc'h yaouanc.

14.

O ! Traitoures miliguët senchit o preposiou ,
 Rac defianç a rit din pa lavarit o comsou ,
 Calz defianç a rit din pa glevan o comsou ,
 E barz en cayer va studi dimeus o preposiou.

15.

Eleal va servicher , va c'hredi a ellet ,
 Rac me signfe gant va goad ar pezh am eus lavaret ,
 Dalhet d'am darempredy a bez fidel dime ,
 Biquen na vemp separet an eil eus eguile.

(4)

16.

Quen a zeuio Doue d'or guervel evit ar vech divea ,
 Da vont da rentà cont da grouer ar bed-man ,
 Quen a zeuio ar maro da finissa or bue
 Biquen na vemp separet an eil deus eguile.

17.

Me am eus guelet va unan diferans diouzin ,
 Mari , Mari , va mestres eus ho terempredy ,
 A tud zo puissant , hac ho deus rent a leve ,
 Me n'am eus quet a vadou gout a rez an dra-ze.

18.

Ouspen da guemense zo emzi va servicher
 Ar madou hac an arc'hant a aller da ober
 Un den a ve demezet a enep e santimant ,
 Ne al quet teri e gontat evit aour nac arc'hant.

19.

Quement zo var an douar , gant va Doue crouet ,
 An oll aour an oll arc'hant en eur pres destumet ,
 Hac e vent roet dime, ne ven quet c'hoas contant
 Ma ne be quet ar bonheur da bossedi va c'hoant.

20.

Me am eus gret eur boquet dimeus a zivision
 Evit rei d'am mestres passetans ar c'halon ,
 Hac am eus gret anean dimeus a buanad
 A lacaio den cren un ruban eus va goad.

21.

O tistrei eus ar pardon , a var lein ar mene ,
 Un devez dreist ar re al hi a lavaras dime ,

(5)

Ma na gueret chanch a gontre pellaat diouzin ,
Ar goal deod miliguet zo e clasq or separi.

22.

Onnes eo ar bromesse o poa-hu dime grêt
Divea m'am boe an enor va mestres d'o coelet ,
C'hui a brometas dime hac ive dre ho le,
Na vigemp quet separet evit deus o coste.

23.

Var ben un neubeut goude , int bet dispartiet
An effet eus ho comsou a so bet eprouvet ,
N'en deus netra var an douar me el assuri erfat
A sco un tol quen mortel evit eur goal deodat.

24.

Pa voan ebars em goele nos goel ar Rouane ,
Me gleve un cun em jardin hac a gane yie ,
Lavaret a ret facil an eunie dre e son ,
Ema da vuia caret en desolation.

25.

Deus ar mintin pa savis , me scrivas ur liser
Da gas d'am muia caret dre dorn eur messenger
Da glevet e santimant evit ar vech divea ,
Goel eo mervel buan evit chom da languissa.

26.

Pa erruas ar messenger ebars an ty va mestres ,
Evoe dignemeret mat evit ezivea gouec'h ,
Quemer a eure al liser ac antren en e hambr
Da scrifa din va honge neuse soudan vantant.

(6)

27.

Ho setañ a c'houlennit emei va servicher ,
 Assuret oc'h dehavet ia , en ber amser ,
 Ma vijaich d'am santimant mad ec'h illit credi ,
 Na voa nemet ar maro capabl d'om separi.

28.

Mes na bremañ na goude emezi te zo certen ,
 An amser din d'o caret ne aruo biquen ,
 Amser dec'h dam c'haout ne aruo biquen ,
 Pa em boa bolontez e voa dec'h va goulenn.

29.

Me zo eur minor yaouanc epoursui va studi ,
 Hac am bo er bloaman cals a velanconi ,
 Hac am bo er bloaman eur galon glac'haret
 Etonnet daret nem garre quet.

30.

Pe deui an neve amzer , ar bleun er spenn guen ,
 E vo calon an dud yaouanc yie ebars en pep tac'hen ,
 Ar fleurieu caer dre ar jardinou a vo tout rejouisset
 A calon an dud yaouanc en pevar c'horn ar bed.

31.

Mes me savo un dourel var lein ar mene ,
 Vis-a-vis da dy va mestres , a d'am hini ive ,
 Davouela gant glac'har dan amser tremenet ,
 Da ober reflexion em planeden gallet.

32.

Pa voa me deut a c'hane eur pennat eus e zi ,
 A me c'hleve al laboucet er bot e fredoni ;
 A me a chom d'ho chelaou hac ive complesant ;

(7)

Rac ar chanson a ganent , a voa sur ravissant.

33.

Canna a rent quer charmant , canna a rent quer yie ,
Rejouissa a rent calon tout quement o c'hleve ,
Ma commançont lavaret dime ive enoyies
Petra dal dide cloarec quemer trididigues.

34.

Petra re did en em nehy er bed man gant da chans
Danve mañou zo certen en abundans ,
Te zo ebars er guer gant da vam ha da dat ,
Ne heus neb necessite avoued nac azillac.

35.

A me zo e cana a yie ma halon ,
A ne meus er bed-man neb provision ,
Finissa res eb retard , neuse en un instant
A rentet joaus calon un den yaouanc.

36.

Gouechal me am boa un amser a zesolation
Mes breman me zo joaus , trionfant va halon ,
Me ahoare gane breman certen va mignonet
Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet.

37.

Va'r ben un neubeut goude int bet en em gavet ,
En ur plac a goste ; o daou , eleac'h me doa lavaret
Da renta an eil d'eguile ar pes a voa gleet ,
A da deri ar biromesse a voa entree greet.

38.

De bonjour deoc'h va mestres, emean prontamant,

(8)

Petra a zo a neve en ho comportamant ,
Diveza ma o coelis e voa brillant o sellou ,
A bremàn no remercàn nemet o squilla daelou.

39.

Hac hi ho respont dime ia en enr guir ber ,
C'hui zo quiriec d'am glac'har emei ma servicher ,
Retornet c'hoas eur vech d'am c'havet me a zo coutant
Da resigna va bue , evit caout va c'houant.

40.

C'hui sur certen plac'h yaouanc , c'hui a voa bet
Ar guenta gouarneres imprimet em speret ,
Mes daelou va daoulagat o voela nos a de ,
O devez va obliget da chench a volonte.

F I N.